


# Benedicite



## - Pedenn araok ar pred -


Sonerez gant Jef PENVEN



Va Doue, bennigit ar boued ezeomp da gemer evit derchel da veva  
 en ho servij, En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Glan, Evelse bezet graet

## - Pedenn goude ar pred -

Sonerez gant M. GLANNDOUR.



Va Doue me ho trugareka evit kement am eus kemeret evit derchel da veva  
 en ho servij. En Ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Glan, Evelse bezet graet.



### ONENN

JULIAN KADOUDAL



Deut warnon tri pe pevar jangard  
 Int em sklej en ere ar stag.


MOZET GANT JEF PENVEN



D'ar prizon ez on konduet  
 Tre daou jangard ez on kaset;



Ez prizon p'edon antreet,  
 En eur basfoz ez on taolet.



P'lec'h eman aet va breur Jozep  
 Pa n'her c'hlevan ket mui o son?




P'lec'h eman aet va c'hoar Mari  
 Pa n'her gwelan ket dre an ti?



P'lec'h eman aet va breur Loeiz,  
 Pa n'her gwelan ket mui james?



P'lec'h eman aet lanneg Bybri  
 Ma jiboesen lies enni?



P'lec'h eman aet ruiall aire,  
 E vezen o vale enni?